



GWERZ

AR SOUS-MARIN "PROMETHEE"

Savet gant ar Barz Kastellad
Francis MOAL (Alc'houeder Leon)

I

War ar paourkeaz martoloded
Eun darvoud braz zo c'hoarvezet
A greiz zedont e gwir vuez
'Zint siouaz! kollet da jamez
En deiz all, eun tamm raok kresteiz
Zedo c'hoaz seder an dud keiz
En eun taol n'oar den vit petra
Ar «Promethee» jomaz a za
Ar vartoloded
Kerkent ioa spontet
Gwelet reent e zoan kollet

DISKAN

Ar «Promethee» zeaz fonz an dour
Eb gallout rei dezhan sikour
Kalz a c'houlenne gant truez
Lezer gantho ho zamm buez
Seiz anezho, ho deuz gellet
Ouz ar maro spontuz tec'het
A re all, zo beuzet siouaz!
Ag a zo kollet da Viskoaz.

II

A breman, e fonz ar mor braz
E man ar «Promethee» siouaz!
Ar Franz a ouel d'he bugale
Kollet vit an eternité
Rankout lezer kreiz ho iec'het
Ho bugale ag ho fried
Evit mont e fonz ar mor don
Gretfec'h ket pebez rann galon
Gwelet ar mammou
Ag ar priejou
Noz deiz o skuilha daelou

DISKAN

Kenavo va muia karet
Lavar ar pried glac'haret
Perak ta, ar maro iskiz
'Deuz da skoet, kreiz da iaouankiz
Perak ta kemer da vuez
Ho na pebez tristidigez
Kenavo, va muia karet
Ennhot me a sonjo bepred.

III

Fransizien, savomp hor moueziou
Diwarbenn ar sous-mariniou
Rak ne glaskomp ket a Vrezel
Nemet ar peoc'h eternal
An traou ze, a zo eul lac'h tud
Gemer c'hanoc'h kreiz ho brud
A dlefe beza difennet
Awoalac'h a dud vez kollet
Ho Franz benniget
Va bro ken karet
Ro buez d'ar Vartoloded.

DISKAN

Kemer truez ouz da vugale
A dalc'h sonj ouz ar «Promethee»
Sonj ebarz e re zo beuzet
Ag a zo evidhot marvet
Lez eta ar sous-mariniou
A lac'h kement a iaouankizou
Dalc'h mad eta da vugale
A dalc'h sonj, ouz ar «Promethee».

(Reproduction interdite).